



Tro ha  
Distro



## Program ar rummad troiñ

*Ne dalv ket ar skrid-mañ e « gwenedeg » e vo graet get ar rannyezh-se e-pad ar sizhun, nag e vo digomprenabl ar stummour! Moian zo oc'hpenn bout ar stummoù KLT àr ar lec'hienn [www.trohadistro.com](http://www.trohadistro.com).*

### 1. Palioù ar rummad

- Gober anaoudegezh get an troiñ dre skrid hag an dermenografiezh, diàr testennoù teknikel : o zalvoudegezh, ur feson d'ober h. c'h.
- Pleustriñ é troiñ a-stroll un destenn deknikel, hir a-walc'h, a-hed ar sizhun.

### 2. Piv ?

**Stummour** : David ar Rouz, get sikour kelennerion arall àr ar lec'h.

**Digor da** : razh ar vrezhonegerion ampart da skriviñ ar yezh.

### 3. Degasit geneoc'h...

Un **urzhiataer** hezoug ma 'peus unan, get ur skridtreter.

**Geriadurioù** ha yezhadurioù e brezhoneg.

### 4. Kanniget e vo...

Testennoù a vo dibabet asambl d'an deiz kentañ get bareoù a zaou, tri pe bevar den :

- skrivet e galleg, saozneg, spagnoleg, alamanteg pe... ;
- **etre 800 ha 1 200 ger** enne, hrevet an niver a dud er strollad a-bezh hag er pareoù ;
- é plediñ get tachenoù teknikel pe deknikeloc'h.

Kanniget e vo deoc'h ur feson d'ober ha teulioù pe titouroù da sikour geneoc'h.

Pegoulz ?	Petra ?	Evezhiadennoù
D'ar Lun – 9 e - 10 e 15	Prezañtiñ ha kendiviz a-ziàr an troiñ	Labour a-stroll
D'ar Lun – 10 e 15 - 10 e 45	Ehan	
D'ar Lun – 10 e 45 - 12 e	Kenderc'hel ar c'hendiviz ha dibab an testennoù orin hag ar strolladoù	
D'ar Lun – 2 e - 3 e 15	Penaos gober ? > Aozañ ar labour a-stroll	
D'ar Lun – 3 e 15 - 3 e 45	Ehan	
D'ar Lun – 3 e 45 - 5 e	Krog e-barzh : lenn aketus, kompren, renabliñ an termenoù diaes pe arbennik, krog an enklaskoù	Graet e vo ehanoù ha studiet asabl ar c'hudennoù gwelet get lod
D'ar Meurzh – 9 e - 12 e	Enklaskoù da gavout an termenoù a faot : klask dielloù pe arbennigerion	
D'ar Meurzh – 2 e - 5 e	Termenografiezh a strolladoù, skriviñ	
D'ar Merc'her – 9 e - 12 e	Skriviñ hag adlenn pep hani e destenn	
D'ar Merc'her – 2 e - 4 e	Kendoniiñ an troidigezhioù, adlenn a strolladoù	
D'ar Yaou – a-hed an devezh	Adlenn get sikour ar stummour pe ur c'helennour arall	Labour a strolladoù
D'ar Gwener – 9 e - 12 e	Adlenn get sikour ar stummour pe ur c'helennour arall, peurlipat an destenn	
D'ar Gwener – 2 e - 5 e	Prientiñ ar veilhadez	Labour a-stroll
D'ar Gwener – 5 e - 7 e	Bilañs ar sizhuniad staj, kempenn ar sal	

ANV : .....

Lennet em eus program ar c'hentelioù **TREIÑ DIWAR TESTENNOÙ TEKNIKEL** ha kadarnaat a ran va dibab da heuliañ ar rummad kentelioù-se bemdez, eus 9 eur da 12 eur diouzh ar mintin hag eus 2 eur da 5 eur goude kreisteiz, a-hed ar sizhun.